

-Les Amis de Jean Mingam, livour ha kizeller

KANNADIG

Bulletin mensuel bilingue d'informations N° 2 – samedi 2 avril 2016

Message de Jean-François Cochard, membre du CA

Invité à rédiger l'édito du Kannadig n°2, j'en profite pour redire combien la rencontre de Jean Mingam fut pour moi une chance de progresser dans la sculpture par un véritable compagnonnage.

La semaine dernière j'ai visité à Saint-Nazaire dans un lieu qui s'appelle « Le Parvis » (centre culturel paroissial : http://leparvissaintnazaire.fr) une exposition de Xavier de Langlais (1906 – 1975) https://fr.wikipedia.org/wiki/Xavier_de_Langlais qui fut professeur aux Beaux-Arts de Rennes, membre des SEIZ BREUR, créateur entre autres du chemin de croix dans l'église de La Baule. Cette expo était exclusivement consacrée à l'art sacré. Comme une grande partie de l'œuvre de Jean Mingam est de cette nature, j'ai pensé que ce lieu pourrait accueillir une expo des œuvres de Jean.

Le Parvis est un lieu culturel catholique très ouvert, les personnes qui l'animent seraient, à mon avis, intéressées par une rencontre.

L'association nouvelle « Les amis de Jean Mingam » en est à ses premiers pas et je pense qu'elle avance « buan hag aes ».

Jean-François Cochard, Mauves-sur-Loire, le 4 avr. 2016

Activité de l'Association

Nous avons été contactés pour une exposition sur le site d'Armor Lux à Quimper. Nous remercions les personnes qui nous ont fait cette proposition. Le CA a considéré que les conditions n'étaient pas tout à fait compatibles avec l'éthique de l'association, nous n'avons donc pas donné suite.

Le deuxième CA s'est réuni le 27 mars 2016 au siège social. Nous avons travaillé entre autres sur les sujets suivants.

- L'élaboration d'un livre ou brochure sur Jean, sa vie, son oeuvre. Pour cela nous allons entrer en contact avec des personnes qualifiées pour ce type de travail (auteurs, éditeurs).
- Des propositions d'expositions en 2017 (les 30 ans de la mort de Jean) : à St-Jean d'Angely
 (17) et à la mission bretonne à Paris et peut-être en Bretagne.
- La restauration de la rosace de l'église du Guilvinec, nous allons nous informer auprès de la municipalité. Éventuellement organiser un événement afin de contribuer au financement.
- Un site Internet est en cours d'élaboration, nous devons obtenir les autorisations des auteurs des photos et textes qui y seront insérés.



Les Amis de Jean Mingam, livour ha kizeller

KANNADIG

Kannadig miziek divyezhek evit kelaouiñ N° 2 –Ar sadorn 2 a viz ebrel

Kemennadenn Jean-François Cochard, ezel KM

Pedet on bet da skrivañ pennad-stur an eil kannadig hag un doare eo evidon da laret en dro eo bet ur chañs bras evidon kejañ gant Jean Mingam e-keñver ma labour kizellañ. Ar sizhun tremenet on bet da welet un diskouezadeg diwar-benn Xavier Langleiz (1906-1975) https://fr.wikipedia.org/wiki/Xavier_de_Langlais e "Le Parvis" e Sant Nazer (kreizenn sevenadurel ar barrez http://leparvissaintnazaire.fr).

Kelenner eo bet Xavier Langleiz en arzoù-kaer e Roazhon, ezel deus ar Seiz Breur, ha krouet en deus hent ar c'hroaz e-barzh iliz ar Baol. Un diskouezadeg diwar-benn an arz sakr e oa nemetken. Kalz a oberennoù Jean a zo sakrel ha soñjet em eus e c'hellfe al lec'h-se kinnig un diskouezadeg diwar-benn oberennoù Jean.

Ul lec'h svenadurel katolik digor-tre eo ar Parvis ha d'am soñj e vefe dedennet an dud a ra war-dro al lec'h evit mont e darempred ganeomp.

Ar pazioù kentañ eo evit kevredigezh nevez "Les amis de Jean Mingam" met mont a ra war-raok tamm-ha-tamm ha buan hag aes.

Jea-François Cochard, Mauves-sur-Loire, ar 4 a viz ebrel 2016

Obererezh ar gevredigezh

Tud 'zo deuet e darempred ganeomp evit aozañ un diskouezadeg e Kemper e ti Armor Lux. Trugarez d'an dud o deus kinniget deomp ar raktres met an doareoù da aozañ an traoù ne oant ket evit klotañ gant ar gevredigezh. Ne vo ket deus an diskouezadeg.

Emvod ar c'huzul merañ a zo bet d'ar 27 a viz meurzh 2016 e chomlec'h ar gevredigezh. Kaoz'zo bet deus ar poentoù da heul :

- Sevel ul levr ha/pe ul levrig diwar-benn Jean,e vuhez hag e oberenn. Mont e darempred gant tud a-vicher a rankomp ober. (skrivagnerien hag embannerien).
- Kinnig diskouezadegoù evit ar bloaz o tont e 2017 (ganet e 1927 ha marv e 1987) 30 vloaz'zo eo marv Jean. Diskouezadegoù e sant yann d'Angély (17), e Ti ar vretoned e Pariz ha sur a-walc'h e breizh!
- Adsevel rozenn ar gelveneg. Mont e darempred gant an ti-kêr evit gouzout penaos ober hag aozañ, ma eo posubl, un darvoud (sonadeg) evit kaout arc'hant.
- Ul lec'hienn internet a zo war ar stern. Ret eo deomp kaout aotreoù an dud evit lakaat al luc'hskeudennoù hag an dielloù a vo lakaet warnañ.

- Nous continuons à établir des contacts avec de nombreuses personnes qui possèdent des oeuvres, des documents ... afin de réaliser un catalogue raisonné.
 Nous avons eu des retours de formulaires d'oeuvres (une trentaine environ) mais il en reste encore beaucoup. Merci donc à ceux qui le peuvent de nous en envoyer.
 Le formulaire avait été expédié dans un précédent courrier, nous pouvons vous en adresser un nouveau si vous le souhaitez.
- Un travail collaboratif par Internet a été mis en place pour les membres du CA, ce qui va permettre une plus grande efficacité dans l'accomplissement des tâches de chacun.

La trésorerie.

Un compte a été ouvert au Crédit Mutuel de La Roche Bernard, tous les chèques émis ont donc été ou vont être débités et la somme en attente de 323,36 € a été virée sur ce compte. Nous avons eu des frais de fournitures (courriers, DVD pour l'association ...) pour un montant de 33,86 €. Le résultat comptable est actuellement de 874,50 euros. Il est prévu l'achat d'un logiciel de comptabilité-secrétariat B-Association pour un montant unique de 79 € afin de gérer rapidement les très nombreux contacts que nous avons. Il a été décidé que les déplacements ne seraient pas pris en charge pour l'instant. Nous préférons utiliser la somme dont nous disposons pour des activités directement en lien avec nos projets.

Recherches

Après différentes recherches, nous avons trouvé les sites des oeuvres du précédent numéro. Le Christ a été réalisé pour la chapelle de l'ancienne clinique Ste Anne de Quimper. Nous devrons nous y rendre pour vérifier s'il est toujours en place.

La sculpture en pierre se trouvait sur la façade de l'école Pie X à Lorient, rue de Clisson, mais celle-ci ayant déménagé, la sculpture n'y est plus. Recherche en cours.

Nouvelle recherche:

Un diptyque (huile sur toile) d'environ 4 m de long "Les joueurs de boule" a été réalisé pour le café Frabolot 24, rue Jules Legrand à Lorient (rez-de-chaussée de l'appartement dans lequel la famille habitait). Ce tableau a disparu, les recherches n'ont pour l'instant pas abouti. Nous espérons qu'il n'a pas été détruit.

Toute information concernant cette œuvre est la bienvenue.

N'hésitez pas à nous contacter si vous avez des idées ou des propositions de lieux pour l'exposition en Bretagne et, éventuellement, si vous ou vos connaissances pouvez contribuer à la réalisation d'un livre sur Jean. Merci à tous.



- E darempred omp bet gant kalz a dud o deus oberennoù ha dielloù evit ma vefe krouet ur levr roll-oberenn. Kaset eo bet deomp en-dro ar paperioù goulennaoueg gant an dud (un dregont bennak). Ma c'hellit, trugarez deoc'h da gas en-dro deomp ar goulennaoueg. Kaset e oa bet deoc'h dre vail dija. Gall a reomp kas en-dro ar goulennaoueg.
- Kenlabourat a raio bremañ ar c'huzul-merañ war internet. Ul labour efedusoc'h a vo a-benn bremañ.

An deñzorerezh

Digoret eo bet ur c'hont er Crédit Mutuel ar Roc'h-bernez. An holl chekennoù a zo bet lakaet war ar gont. An arc'hant a chome(323.36€) a zo bet lakaet ivez war ar gont. Frejoù dafar a zo bet ivez (lizhiri, DVDioù) 33.86€ en holl. 874.50€ eo an disoc'h kontaouiñ. Prenet e vo ur poellad kontaouiñ ha sekretouriezh "B-Association" evit 79€. Aesoc'h e vo deomp merañ kement chomlec'h a zo. Ne vo ket distaolet ar frejoù hent evit poent. Kavout a reomp gwelloc'h implij an arc'hant evit aozañ traoù a zo liammet gant ar gevredigezh.

Enklaskoù

War-lec'h an enklaskoù a zo bet graet ganeomp eo bet kavet lec'hioù an oberennoù embannet b'ar kannadig diwezhañ.

Savet eo bet ar c'hrist evit chapelig klinikenn gozh santez Anna e Kemper. Rankout a rimp mont da welet ma eo lec'hiet du-hont c'hoazh.

An delwenn maen a oa war talbernn ar skol Pie X en Oriant, straed Clisson, dilojet he deus ar skol hag an delwenn n'emañ ket ken aze. Da genderc'hel an enklask.

Ensklask nevez:

Savet eo bet gant Jean un oberenn a div banell (eoullivadurioù war lien) pevar metrad bennak a hirder, anvet "Les joueurs de boule" evit tavarn Frabolot, 24 straed Jules Legrand en Oriant. (E traoñv ranndi ar familh e oa). Aet eo diwar well an daolenn ha disoc'h ebet a zo bet evit an enklaskoù. Gant spi n'eo ket bet distrujet.

Ma vez titouroù ganeoc'h diwar-benn an daolenn-mañ e vo degemeret mat.

M'ho 'p eus mennozhioù pe kinnigoù evit kavout ul lec'h evit un diskouezadeg e breizh, ma c'hellit reiñ un taol sikour pe ma anavezit tud a c'hell sikour ac'hanomp evit sevel ul levr diwar-benn Jean, trugarez vras deoc'h.

Bulletin d'adhésion



Les Amis de Jean Mingam, livour ha kizeller

lesamisdejeanmingam@gmail.com

Président: Bertrand Lochmann 02 40 46 13 71

Coordonnatrice: Koulma Mingam-de Cacqueray

06 11 54 96 16

Siège social: Saint-Leuffroy - 56130 PEAULE

N	\sim	m	
ıv	u		

Prénom :

Tel mobile :

Tel fixe:

Mail:

Adresse :	Code postal :			Ville :
Adhésion annuelle de 20 € payé _l	oar chèque	ou	espèce	
Vous pouvez également verser u	n don à l'assoc	iation	de	€ par chèque ou espèc

Date : Signature :

Vous possédez des oeuvres de Jean Mingam (si oui, combien ?) :

Êtes-vous d'accord alors pour remplir une fiche d'inventaire, une pour chaque oeuvre ? (Nous pouvons vous en adresser par mail ou par courrier postal)

Vous possédez des documents concernant l'oeuvre de J. Mingam acceptez-vous de nous en faire une copie (dans la mesure où ces documents présentent un intérêt pour la découverte de l'oeuvre) ?

Avez-vous connu Jean Mingam ? (Si oui souhaitez-vous témoigner ?) Vous pouvez continuer au verso de cette fiche.

Parlez-vous breton ? (Si oui acceptez-vous d'être enregistré pour parler d'une œuvre de Jean ou témoigner de votre rencontre avec lui ?)

Quelles sont vos attentes et/ou suggestions? (Vous pouvez continuer au verso).

L'association est régie par la loi du 1er juillet 1901. Les informations figurant sur cette fiche sont exclusivement réservées à l'usage interne de l'association. Conformément à la loi informatique et libertés du 6 janvier 1978 vous disposez d'un droit d'accès et de rectification aux données personnelles vous concernant. Vous vous engagez à respecter les statuts. Votre adhésion prendra fin dans un an après la date d'adhésion.

Fichenn emezelañ



Les Amis de Jean Mingam, livour ha kizeller

lesamisdejeanmingam@gmail.com

Président: Bertrand Lochmann 02 40 46 13 71

Coordonnatrice: Koulma Mingam-de Cacqueray 06 11 54 96 16

Siège social: Saint-Leuffroy - 56130 PEAULE

Anv	fam	nilh	:
,			•

Anv-bihan :

Pellgomz hezoug:

Pellgomz ::

Chomlec'h mail ::

Chomlec'h	Chomlec'h :		Kod-post :		Kêr:
20€ an em	ezeladur bep bloaz pa	eet dre	chekenn	ре	bilhidi
Un donezon d'ar gevredigezh a c'heller ober ivez, sammad			€ dre chekenn pe		
bilhidi	Deiziad :		Sinadur	•	
Hag oberennoù Jean Mingam a zo ganeoc'h (ma eo ya, pet ?) :					
Hag a-du emaoc'h evit leuniañ ur fichenn renabliñ, unan evit pep oberenn ? (Gallout a reomp kas deoc'h dre vail pe dre ar post)					

Ha dielloù diwar-benn labourioù Jean Mingam a zp ganeoc'h, a-du e vefec'h evit ober un eilenn (ma vez dielloù pouezus e-keñver e labour) ?

Hag anavezet ho 'p eus Jean Mingam ? (Plijout a rafe deoc'h testeni ?) Gall a rit kenderc'hel en tu all.

Komz a rit brezhoneg ? (ma eo ya, hag a-du e vefec'h bezañ enrollet ha komz diwar-benn un oberenn pe penaos ho 'p eus graet anaoudegezh gantañ ?)

Petra eo ho c'hoantoù ha/pe kinnigoù ? (Gall a rit kenderc'hel en tu all)

Meret eo ar gevredigezh dindan lezenn ar 1añ a viz gouere 1901. Implijet eo an titouroù-mañ nemet e-diabarzh ar gevredigezh. Da heul al lezenn stlenneg ha frankizoù ar 6 a viz genver 1978. Gall a rit mont da wellet ha cheñch ho titouroù personel. Gouestlañ a rit doujañ ouzh ar skridoù diazez ar gevredigezh. Echuiñ a raio ho emezeladur goude ur bloavezh.